

FALLAGRIES
AR GOMMUN RU
EN PARIS

Var ton :

Mæster an env, an douar, carguet a buissanc,
Gret eur zel a drue da rouantelez Franç;
Nin a deu d'ho pidi a greis hon c'haloanno
Da lacat eun termen da fiu hon malheurio.

Frañç oa arrogant breman zo eur blaves,
Hirio man en canvo hac en tritidigues;
Anaveout a rau eals d'eus a dud savant,
Hac e zo estonet breman pe p'romprenant

Penaus e zomp rentet bars en quen ber amzer;
Ar leune, d'ar c'houlz-man, oamp glorius ha fier.
Me ne non man ebet nemert eun innoçant,
Memes tra latin d'ech voar-ze ma zantimant :

Hon ourgouil zo quiriee mar gomp bet discaret,
Lennet an Aviel hag e cafet merquet;
« Piou benac en em zav a vezo disquæret,
« Nep e n'em huella a vo izelleet. »

Ar vanite e n'eus, d'eus e lein, en envo,
Discaret Lucifer e creis an tourmancho;
Ari oa bais en Frañç quemement a vanite
Ne n'em soumette quen an eil den d'he guile.

Dalec an huellan betec an izellan.
Eur c'hemenner, zo quen, n'eus quel goassoc'h 'vitan,
Eur montr hac eur chaden stag eus toul e vrageu,
Eur vez eo ho'guellet gant eun dizac'her laou.

Eur vatez zo caëroc'h guisquet evit e mæstres,
Eur mevel goel montel 'vit e væstr alies,
Hag ar mæstro d'ho zro a labour mad ive,
C'hoari n'eus an otrou clasq tec'hel aroc d'he.

Mar gue an otroune guisquet en liviten,
Ar paysant ive zougo hir e chupen ;
Coulscoude an otro ne n'eus istim ebet
Vit ar paysant ques caër e n'eus bout montel.

Gleet e coulscoude d'an otro respecti
An hini fornis bara dan da dibri ;
Digasset e zo dimp er vech-man quenteillo,
Men gred e vemp furoc'h eun neubet blavezio.

Rivinet e hon bro gant ar Brussiannet
Ha c'hoas ho momp labour arog he vint paet ;
Quement den zo en Franç e n'eus e lod ingal ;
Daou scoët ha daou-ugent, nemert pevar real,

A digoue gant pep den d'eus ar Franç da peo
Quen ma renco Bismark zina quouitanç d'hon bro ;
Mes chefu danzeet labour nevez dimp-ni ;
Ar guer d'eus a Baris he ya da revolti.

Ed e ar GOMMUN RU da væstr er gabital
Commandi rang breman er Gard national ;
En amzer ar siech ho devoa gret fontan
Mitrailleuso nevez demeus ar choas quantan.

Pourveet mad e zint en amenution,
A fusillou Chaspot hag e bejou canon ;
Voar lein monten Montmartre ho deus batterio
Bezan d'eus quement-al'placet voar ar fortio.

Biscoas ne n'eus gallet ar re Ru n'em blantan
Bars e n'eur plaç quen fort vel me maïnt en dro-man.
Partout dre an Europ an dud n'eus elevel
E oa bars en Paris la Commune proclamet.

Al lacras deus ar bel, ar fallan friponnet,
Meveillen Lucifer, tout e zint diredet
D'ar guer d'eus a Baris d'ober fallagries,
Da laza Belefen, da danna, da laëres.

Bezan oa zoudardet 'vit lacat urs en quer,
Ha tout ho d'eus savet cros ho fusul en aer ;
Daou General e oa ho commandi deze,
Lest ho d'eus ar re Ru da guemer aneze

Massacret int ho daou gand an dud revoltel,
Graç d'ho ine da vont e zeün d'ar joüstet ;
Ari e Mac-Mahon bars en Franç adare,
Pedomp an Eternel dasten dan he vue.

Laquet e Commandant en chef voar hon arme,
Trec'ho raï *ar re Ru*, a drugare Doue;
Mar gonne *la Commune* nimp vo merzeriet,
Hano Doue en Franç a vezo effacet.

Hac ar buguel bihan, dal me vezo ganet,
Gant he dad hag he vam enn a vezo lammel :
Bars er guer a Baris breman he difennet
Prouonç hano Doue bars en scolach ebet.

Tado Dominican, Frerien ha Sœurseset,
Beleien, Arc'hescop, tout e zint prisonniel,
Quemeret 'vit otaj gant an dud infernal,
Dre pevar c'horn ar hed zint prest dor quement al.

An Ilisou santel zo pillet ha laëret,
Ha colonen Vendôm gante zo discaret ;
Tud vad d'eus a Baris, fin e vo d'ho canvo,
Na glever nos ha de 'meïl trous ar c'hanonno.

Goude eïs de gombat e n'eus hon zoudardet
Quemeret fort Issy gant an insurjeet ;
Cavet ho d'eus voar-n'han nao bez canon ha cant
Cals amenution, bevanç ha guip-ardant.

Ben ar bevarzecvet devez d'eus a vis maë
E ze bet quemeret for de Vauv adare ;
Tri-uguent pez canon voar nezan zo cavet,
Ha prisonniel zo cals d'eus an insurjeet.

Eur zoudard d'eus hon re ho difoa quemeret,
En ping nerri e dreid hi e n'eus an staguët,
Gant ho baïonnettes an dud fal ha mechant
N'eus gret dan perisso bars er brassan tourmant.

Ar fort zo bars 'n'eur stad truezus da velet,
Goloet e an dachen a dud varo ha blesset,
Ar re a hel parlaot e lavar : « Nan Doue.
« Cavet ar vadeles d'achui aneze »

An naovet-var-n'uguent, ar general Douay,
Dre an hor a Saint-Cloud, en Paris e antre
Ha dre dorejou al l'Amiraolt ha Clinchant
Gant pep a gorf arme e c'heulie anezan.

Pa velas an dud fal-penause oant collet
Eun nombr a dud santel ho deus merzeriet,
Ar pervet-voar-n'uguent devez d'eus a vis maë
Eu membr bras d'eus *la Commune* d'ar prison a zeue.

Gant Gard national, Brigadier, Directeur,
Ha quement e fote 'vit consom ar malheur :
C'hoec'h den dimeus hon re, emezan, zo collet,
Hac eles man c'hoec'h all nin renquo da gavel.

Choaset e d'eus bet e c'hunan c'hoec'h otaj
Pere e c'ha da ober fusulli voar ar plac ;
N'em dirijet e bet en tresac ar c'hachot
Lec'h me oa enfermet an otro n'Arc'hescop.

Nem sellet er registr e c'helves anezan,
Gant eur voes stard ha ferm e respontas : « Presan, »
C'hoas e n'eus l' ret d'he quent ma disquennet :
« Justiciu tirantet a zo pel clasq donet. »

Ar oc dont a c'hane pemp al zo galvet,
Hac o c'hoec'h assembles de traon int disquennet.
A reguen eus eur vur ho cheinou zo c'harpet !
Daou *fu de peloton* racial a zo clevet !.....

Ha tout ar victimou, ajustet voar an dro,
A goes assembles, Doue d'ho fardonno !
Abeu an de voar lec'h ho d'eus continuet,
Ouspenn c'hoec'h-oguent den ho d'eus merzeriet.

Evit peur guroni ho œuvro miliguel
Gant poultr hag ivoul petrol an tan ho d'eus laquet
Bars er c'haeran kastel zo bet biscoas er bed :
Eis-uguent million a domajo d'eus gret !

E c'hoec'h ho tro var-dro e veler goloet
Ar guer d'eus a Paris gant flammou ha moguet,
Men ho les da sonjal er spout hag er spouton :
Crenan ra calonou an ol dud afeçon.

Na veler en Paris 'met moguet ha flammo
Ha ne glever quen son 'met trous ar c'hanonniou ;
Redec e ra ar goad d'an traon gant ar ruo,
Goloet e Paris d'eus a gorfo maro !

Gret zo prisonnierienn ouspenn cant mil an-he,
Mout e reñt en exil d'achui ho bue ;
Ar cheffo bras an he zo ive prisonniel
Chomet a rañt e bars quen a vezint juget.

Trec'het e m'eump voar-n'he a drugare Doue,
Hac ive Mac- Mahon, commandant an arme,
C'hoas e ze gleet d'imp bezan reconnaissant
D'hon arme courajus d'hon zoudardet vaillant.

Ar zon-man a zo gret bars en parous Kerien,
Gant JEAN-MARIE EN NENT, n'em zerri eun drecen ;
Doue da rei ar c'hraç da guement e clevo
De n'em velet eun de assembles en envo.

Propriété de l'Éditeur, J. H.